

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

44. GWERS SAN JAN

( follennoù 140 - 143 )

- Konje tad a vam a houlenan  
Konje da vont da pardonnan

—  
Dar pardon bras da Landreger  
Mond a ran arrok va breur mager

—  
Mond a ran arrok va breur mager  
ag oll dud iaouank ar chartier.

—  
-Dar pardon bras c'hui nen deot ket  
Rag an avel a zo chenchet.

—  
An avel zo divar ar ieodet  
eur malheur benag zo arruet  
eur vagat tud a zo beuet

—  
eur vagat tud a tud iaouank  
Bes a voa ane eur seiz a kant.

—  
Mui a keus am boa da nikun ane  
Voa deur c'hreg iaouank a voa gante  
a voa o tougen bugale

—  
Ar c'hreg iaouank a pede Doue  
Dre ma ie ar vag var he koste :

—  
- Autrou Sant Matulin Monkontour  
Konditor an avel hag an dour,

—  
Preservit din va hinnoçant  
ia da fons ar mor eb badichan.

—  
Ia gant an defot senti  
e maom e vont da konfonti

—  
Adieu va mam, adieu va zad  
Dam pried e vo ar gallonad.

- 118 -

A c'houi otrou San Jan ar bis  
Lakit va renta en ho illis.

Me a reïo deoc'h eur banniel guen  
A vo seiz kloc'h archant doch pep pen.

Me a reïo deoc'h eur banniel rus  
A vezo allaouret an daou tu.

hag a reïo deoc'h eur gouris koar  
a reïo ter zro d'ho holl douar.

hag a reïo ter zro do koueret  
teir all d'ho c'hilis viniget.

hag a reïo deoc'h eun donezon  
A vezo kaer deoc'h deiz ho pardon.

A vezo kaer doc'h henori  
Deiz ho pardon, gouerches vari

hag a reïo deoc'h a lien skler  
habillamant da seiz oter.

A reïo deoc'h kalis, platinen,  
Belek, da lavaret an offeren

Prosession Plougasnou a San Jan  
hini Gwimek a Lokirek

Ed int da drezen Sant Jan  
Da kerc'hat ar bugel hag e vam.

En trezen Sant Jan pa int erruet  
Ar bugel ag e vam o deus kavet

En he zorn e voa eur bot bezin glas  
Da ziskoez e voa ganet er mor bras

eun all e voa var poul he gallon  
Da ziskoëz e voa ganet er mor don.

en e zorn all e voa eur billet  
An testamant en doa e mam gret.

An otrou person a lavare  
Dar sakrist eun deiz a voe

Digorit frank ar pors-goeret  
Me e vel erru an dud beuzet

---

E goeret Sant Jan e zin bet rentet  
A c'hreg iaouank zo enteret  
hag e bugel zo bet badezet,  
Kasset d'he tud da Plouaret

~~~~~

Jannet Puill, klasqueres a henvik 13 genver 1851

~~~~~